

UR PRIZ LENNEGEL BREZHONEK NEVEZ !



Ur priz lennegel a vo deroet, da geñver Saloñs al levrioù e kêr Gwened, d'un oberenn skrivet e brezhoneg hag embannet e-kerzh ar bloaz 2010.

Ken puilh eo bet ar c'hasadennoù levrioù gant an embannerien m'eo bet rediet ar juri (pemp den zo anezhañ) d'ober ur rakdibab. Chomet ez eus seizh oberenn war ar renk, danevelloù ha romantoù anezho,

KAN AR MEIN	MICH BEYER	AN ALARC'H
TRAOÙ KOUER	HERVE BIHAN	AL LIAMM
SONATA IN E. MINOR	KRISTIAN BRISSON	MOULADURIOÙ HOR YEZH
KERGELENN	HERVE GOUEDARD	AL LIAMM
AR MARC'H GLAS	RIWAL HUON	AL LIAMM
BUHEZ PREVEZ LOLA P.	MAÏWENN MORVAN	EMGLEO BREIZ
AR GITAR TREDAN	JAKEZ-ERWAN MOUTON	AN ALARC'H

Diouzh o lenn en em laka war-wel awen hag ampartiz hor skrivagnerien evit brasañ plijadur o lennerien. D'an 19 a viz Even e ouzimp piv e vo ar c'hentañ loread deus ar priz lennegel nevez aozet gant tud ti-kêr Gwened.